

286

Ar Butuner.

(f° 122)

e fin miz ebrell e komançamant mae
eun dervez e zessa gati labourer diouz an de.

haq hi mond a lavaret kazj en eur ger ber
Biken jamez emezj nem bez eur butuner.

An den man a ioa den a speret ne lavar gir e bed
ne da den de neum damall ne met kiriet e ved

ag e neur penad goude int e neum rankontret
ar plac'h a houlen ontan e pelec'h oas chomet.

Da petra, emezan, e zin d'ho koëllat d'ho ti
Pa na doc'h ket kontant d'am goëllat o fumi?

— mar a meus lavaret me a houlen pardon
me zo kontant e fumot deus a kreis va halon.

— Sallokras plac'h iaouank o trugarekat
Ar c'hoizjou a leverit a plij d'am daoulagad,

me a meus are'hant avoalc'h ervid kaout butun
A drugare va Doue ne renkin ket iun.

Pa zan me dar marc'hojou gant va marhadourez
me zo sur eus va vora a kiz fresk aliez

haq eun neubeut dineret da zont gane dar ger
O c'havin da implija dre ma mezo offer.

— Fachet va mestrez ouzin abalamour ma fuman
mond en noz da c'hoari c'hartou a var an deiz da eva.

7

Katherine Laninor, 3 mars 1851.